

# G U E R Z


Var sujet un Den Yaouanq a voa deut da  
baea pêvar scoët goude ma voe maro.

PERET-SANTEL, anflammit va spéret,  
Li gana ur C'hantic evit ar Vretonet,  
Var sujet un exempl peini so êruct  
bars e Breiz-Izel, e mis Du tremenet.

Crena a ra va c'halon ive va oll memprou,  
Va daoulagad ne reont nemiet scuilla daelou,  
O tont da gonsideri peguen trist eo ar matier :  
Goulen a rân sicour deus ar Verc'hes santel.

Un den yaouanq, siouas, voa n'em abandonet,  
Goude ma voa maro e dud gant ar c'hlêñved,  
A voa n'em abandonet da bep sort tristidiguez,  
Da bep sort tristidiguez, da bep sort paourentez.

Evel ma voa yaouanq, na grede clasq netra :  
Vud vad dre charite a gasse tamou dezâ ;  
Evel ma voa yaouanq e teujont d'er scandalat,  
Pa na gare sevel ha mont da labourat.



Soufr a ra mil injur gant guir baciantēt,  
**O** laqat e fianç er Verc'hes beniguet,  
**D**re m'en devoa he imach hac ini ar bassion,  
**H**a ma rē diraze bemde e oréson.

Un ozac'h eus ar c'hontre, un deu eus ar c'harfer  
**A** deuas d'e velet, o clêvet e vizer,  
**E**n ur lavarat dezàn : dens d'am zi da labourat.  
**A** paour-qèz a respondas : ne meus qet a zillad

Gouzout a ran certen labourat an douar,  
**M**es, allas ! eme ar paour, ne meus na pal na mar :  
**F**êvar scoet a vanqfe din evit en em eqipa,  
**M**e a yelo d'nò ty sur evit ho paea.

An ozac'h var ar guir a ro ar pêvar scoët,  
**O** lavarat dezàn : va mignon, ne vanq qet,  
**E**n ur lavarat dezàn : deus d'am zi da labourat  
**P**a po pet pal ha mar ha prenet da zillad.

Monet a ras d'e di, ma voe ur pennat mat;  
**P**lijout a rē dese certen da labourat;  
**U**na dejz dreist ar re all e voent meurbet estonet  
**O** sonjal er paour-qèz pelec'h e voa chomet.  
**M**a ejot da velet, ma voe cavet maro  
**E**bars en e gamp var un dornad colo.

Laenet voe e gorf vit beza entéret,  
**A**r brut a zavas prest, ma teuas tud d'e yelet;

An den-mâ a deuas ivé vel m'oa d'eus ar c'hanton,  
 A deuas d'e velet. O Doue pebes eston !

Pa zorti eus an ti , d'an dud e lavare :  
 Orato birviqen e ene ne antre  
 En barados Doue , qen en devo paet  
 Ar pez a rois dezàn neus qet pell pêvar scoët.

Dre ar c'homzou terrubl pere a brononças ,  
 N'oun penos an douar d'e lonqa na zigoras ,  
 Oc'h arréti un ene a voa e vont d'ar joayou ,  
 A vije recevet gant Jesus en ênvou.

Ar Verc'lies glorijs Vari , dre ma voa dei fidel ,  
 A accordas ur mennat evit he servicher ,  
 Mar teuje var an douar un instant da labourat ,  
 Evit monenet d'an trî da baea ar barbar.

Monet a ras d'e di ha ma voe recevet ;  
 Goulen a ra labour , ma voe dezàn roet ;  
 Labourat a ra er parc qement hac han tri guella ,  
 Ar pez zo estonus , hep debri nac esa.

Pa zeu coulz ar repas , caer vije er pedi  
 Evit monet gante assambles da zebri ,  
 En em denne a goste , hac eno var e hinou  
 En em string d'an douar ~~evit~~ souffr e boaniou .

Dont a ra'n uspiller , qemer a ra eston ,  
 Hac én monet ractal da laret d'ar Person .

**En** devoa ul labourer hac a r̄e qement ha tri,  
**Ar** pez so estonus , ep eva na debri.

Ma , eme ar Person , continuit bepret ,  
Brēmā souden vatant me yélo d'e velet.  
Pa éruas er parc , dre bermission Doue  
E hanaveas pront penos voa un ene.

Me conjur , eme ar Person , lavar dīn , me a ped ,  
Ne qet hirio eiz de am boa da gorf entéret ?  
Petric a zefot dide , petric a glesques amâ ?  
Petric a zefot dide evit da zelivra ?

Pêvar scoët am boa bet digant mestr an ti-mâ ,  
On deut dre vouir voyen sur evit o facea :  
Oh ! diech pêvar eiz certeu a vez roct ,  
Ur veach , paour , qen a vi delivret.

Ne meuz qet an pouar da antren er joayou ,  
Nemet gant va Æl-mat e cléfen ar c'hélou :  
Pedit Done evidon ma hin prest d'an ênvou ;  
Varc'hoas d'ar memes heur me rento ar c'hélou.

Dont a ra ar Person da zigas an arc'hant ,  
Ma vije delivret a boan hac a dourmant.  
Me , eme an ene , am boa int bet digantân ;  
Po heus ar vadelez , me rento dezân .

Pa asternas e zorn da guemer an arc'hant ,  
Entas an ardeur , e boan hac e dourmant ,

E vrec'h deo betec e scoa sur a so bet dêved ,  
An arc'hant eus e zorn d'an douar so queet.

Adieu , Autrou Person , me ya bremâ d'ar joayou ,  
Me bedo evidoc'h Jesus-Christ hon Autrou .

Pa d'eo un den dêc'h un dra , pa yêl eus ar bed-mà ,  
Elec'h leirout droug , pedit Doue gantâ :  
Pedomp bepret ha guelomp ma zefont da repos ,  
Ha da veuli Doue en gloar ar barados .

FIN.

C H A P I T R E AR C A R N E L

---

DEMP d'ar Garnel , christenien , guelomp ar religou  
Eus hor breudeur , c'hoareset , hon tadou , hor mamou ,  
Demeus hon amezeyen , hor brassa mignonet ,  
Guelomp ar stad truezus e peini int rentet .

Guelet a réot anezo torret ha bruzunet ,  
Ha memes an darn-vuya a so en poultr rentet ;  
Ne veler mui o noblanc , o danvez , o guenet ,  
Ar maro hac an douar o deus o distrujet .

Ar paour hac ar pinvidic , ar mestr hac ar sujet ,  
Oll e zint rentet henvet , oll int disevelebet ;

Ne zeus mui nemet esqern , poultr ha breinadurez ,  
Dign eus a gompassion hac ens a beh truez.

Hoguen er stat truezus e pini int rentet ,  
E parlantont e langach mud eloquant meurbet  
Ous peb-unan ac hanomp , mar qeromp profita  
Qeit ha ma plijo gant Doue hor lezel er bed-mâ.

Clêvit eta anezo , ha grit attantion ,  
E desir da brofita eus a greis hò calon :  
Lavaret e rint deoc'h e zint bet er bed-mâ ,  
Hac e vanfot evelto pa sonjot nebeuta.

Ni so bet var an douar o rën qercoulz ha c'hui ,  
O parlant hac o vale , o heva , o tibri ,  
Ha cétu amâ brêma er stad ma zomp rentet ;  
Goude m'omp bet en douar o vezur ar prénevèd .

M'oa un den cre ha galant ha me un dijentil ,  
Me voa un den pinvidic , ha me un den habil ,  
Me meus collet va noblanç , ha me va oll danvez ,  
Me va nerz ha va guenet , ha me va gouizieguez .

N'hon eus cavet er bed-mâ nemet hon œuvrou-mad  
Da bresanti d'hor Barnet , d'hon Roue ha d'hon Tad .  
List eta madou an douar detestit ar viçou ,  
Hac ornit mad hoc'h ene a bep seurt vertuziou .

Mar goulennit diganeomp pelec'h êt hon vertuziou .  
Ni responce : d'ar purgator rac onnes eo hor bro :

E maint en tan o tévi vit peur-béa o die  
 Contractet var an douar da justic un Doue.

Eus a ouelet ar flamou na cessont o criaf,  
 O c'houlen ho pedennou, ma ellint sortial  
 Eus ar prisoniou teval e pere int tolet :  
 Hastit, hastit d'hor ziconr, ha na zaleit qet,

Dêc'h-u en em adressomp, querent ha mignonet,  
 Da gaout memor ac'hanomp, pa zeot dre ar vêret,  
 Livirit en ur dremen : Doue ra bardono  
 D'an anaon er purgator, rac onnes è hor bro.

Eun aluzen, eur beden grêt ~~gant~~  
Eur yuu, ~~pe eun ofer~~, pe ur communion,  
 A ell calz hor soulagi, ha berrat hor poaniou,  
 Hac on tenna en euu instant a vouelet ar flamou.

C'houi, Béleyen charitabl, en eus hor c'hunduct  
 En hent hor zilvidiguez pa edomp var ar bed,  
 Cuntunuit c'hoas un nebeut da gaout truez ouzomp,  
 Oc'h ober dre drugarez, œuvrou mad evidomp.

Ispicial o pedomp, pa deuit da celebri  
 An oferen en Ilis, clêvit neuse hor c'hri  
 Eus a ouelet ar flamou o c'houlen digueneoc'h  
 Ma teuot d'ober gant Doue dre'r sacrific hor peoc'h.

Ha p'or bezo peur baët ar boan dleet d'hor pec'het,  
 Ni or bezo deoc'h neuse digant Doue rejet.

Pedit, ni a rai ive ; en em sicouromp oll,  
Ennes vezo ar voyen ne dai den da goll.

Evel an dour o vouga, an tan-goal alumet,  
Au tan eus ar purgator a vez ive mouguet  
Dre ar sacrific santel offret var an auter,  
Da c'houlen hon delivrau<sup>ç</sup> ous Doue hor Zalver.

Pa zorti an eol sqendus a zindan ar gouabren,  
Ar bed oll en un instant a receo selêrigen ;  
Ni a sortio ive selêr evel ar steret  
Eus ar poaniou a zoufromp dre'r sacrific offret.

~~Tudan ha~~ mamou, breudeur ha c'hoareset,  
Adieu, querent, mignone~~r~~ ; ~~Adieu~~ dêc'h, tud ar bed ;  
Ni a ra deoc'h brêmâ hor c'himiad driveza ;  
Adieu deoc'h : qen a vez o traouyen Josapha.

Roit ar repos eternel, va Jesus, va Autrou,  
D'an oll eneou decedet, pere so er flamou,  
Ebars en ho parados da veuli da james  
Assambles gant an oll Sent a gant an oll Ælez.

## FIN.